

AR ROUE GRALON, KÆR IS

HAG ILIS MIRACULUS AN ITRON VARIA REMENGOL



« 'Neb a hed Guerc'hes Remengol,
« Birviken ne dañ da goll !... »

En escopti Kerne, el lec'h ema brema môr Douarnenez, e oa guechal eur gær vras meurbet, hanvet Is.

Eub voguer leden hag buel, gant sklojou houarn he difenne deus ar môr. Er gær-ze ne velet, etouez an dud pinvidic, nemet dizurs, goal exempl ha fallagriez. Gralon, pehini a chome neuze en Is, a oa roue Breiz-Izel. Eet e oa brezeller, en e isouankis, ha rust en andret he zujidi; mæs ena he gosni, sklerijennet dre ar feiz christen, e teuas da veza douç evel eun-oan. Hirvoudi a re alies var dizursou Is, ha var ar vue dirollet a rene e verc'h, ar brincès Ahès, gant an noblañç iaouañç a gær ha deus ar vro, hanvet hirio Kær-Ahès, pehini a oa dez-hi a leve.

En amzr-ze, ive, e oa e Breiz-Izel, daou abostol santel, daou vignon da Zoue, sant Kaourintin, kenta escop a Guemper, ha zant Guenole (1), kenta abad a Landevennek; alies ho devoa prezeguet ar feiz er gær a Is, ha gourdrouzet ar roue Gralon, abalamour d'an droug-oberou, d'an torfejou ha d'an injustiçou a ret, bemdez, e pales he verc'h iaouañç; mes goab a ret anez-ho, hag ar roue, simpleet dre an oad nen devoa mui a c'halloud avoalc'h evit arreti dizurzou ker bras.

Doùe a skuizas, er fin, o velet Is kaledet en e fec'hejou, hag a roas da anaout da Æl Breiz-Izel, he vignon Guenole, penos, eb dale pell, ar gær gaër-ze a vije beuzet gant ar môr. Ker-kent, Guenole a bignas var he varc'h, hag a redas da gær Is, o sonjal c'hoas dizarmi koler Doue. Mæs tremenet e oa an amzer a druez. P'a en em gavas an abad zantel, var dro anternoz, sklojou Is a oa digor, hag ar mor a c'hroze spoutus, o tiruillal var dud an tier hag ar palechou. Guenole ne allas savetei nemet Gralon ep ken; gueled a rer c'hoas roudou treid ar marc'h er garrek, var behini, abaoue, abadet Landevennek, arog komer ho c'harg, a deu da ober o feden ha da anaout ar roue Gralon evit fondatour o c'houent.

Ahès, merc'h fall a roue, kiriek a revin Is, o oë troët e *Mari-Morgan*, anter maouez ha anter pesk. Pa bar al loar, he c'blever c'hoas alies o cava, var môr Douarnenez, a uz revinion ar gær veuzet. He daoulagat a zo evel diou stereden, he bleo evel an aour, he gouzoug hag he diou vron ken guen hag an erc'h, hag e mouez melodius a laka da gouskat dre e chalmou; evel ze martolodet ar vro, ractal me c'hevont, a lavar entrez-ho gant spouron: « Tec'hom, Ahès a-so savet » deus e falès, ar goall amzer ne ma ket pell ha ma taleomp, » e vezimp tolet, kousket var ar rehier. »

Kær Is ne ma mui, evel Sodòm, Gômor ha Babylon; hag hirio ar môr a ruill dreist he fen.

Da zao-heol Gralon, o veza pignet, gant Guenole, var lein Mene-Hôm, a dolas ac'hane eur zell truezus var he lerc'h; mæs el lec'h ma edo ar gær gaër a Is, ne velas mui nemet môr

(1) *Guen-oll-e, Oll-e-Guen* (il est tout blanc), hanvet evel-ze gant e van ar santes Vea, abalamour ma oa eur buguel koant ha fur. Sant Guenole dre e vertuzion, en deus meritet an hano kær a Æl Breiz-Izel (l'Ange de la Bretagne).

Douarnenez, hag e kenezas d'an daoulin evit trugarekat Doue hag ar Verc'hez da veza saveteet he vuez.

Pa zavas divar he zaoulin, e velas dindan an heol, o lugneri, *Ru-Men-Goulo*, pe *Men-Ru-ar-Goulou*, var pehini vije sacrificiet tud heol, a pep mis, eur buguel bian c'hoas eus ar vrôn. Neuze, beuzet en he zaëlou, hag e zaoulagad zavet e trezec'h an En, e lavaras d'e vignon zantel :

Voar ar Men ru zont, konsacret da eun doue barbar, me
a rai sevel eun Iis kaër d'ar Verc'hes, hag e lec'h ma skuil-
ler ar goad da Tentatès, a skullio Mam ar guir Doue he
graçou var Breiz-Izel.

Gralon a zalc'has mad d'he bromessa, ha beleyen ar bayan-
net, o veza en em revoltet, pa velont dispen templ an doue
faos Tentatès, ar roue christen ho zrehas, e kever Argol, e
pen ar Vretonet konvertisset.

Goude beza gret he beden, var Mene Hòm, ar roue Gralon
a heuilas Guenole da abati Landevennek, savet gantan eun
neubent blavezion kentoc'h. Diaruk kement-ze, en deoa
c'hoas roët e balès, e Kemper, da zant Kaourin, pehini en
deoa torret an naon dezhan, ha d'he compagneuz, gant eun
tam deus he besk bian. E plaç ar palès-ze, e man bremau ilis
kaër katedral Kemper.

Gralon a dremenas e Landevennek ar rest ens he vuez, en
eur binijen galet, hag aliez e ze gant e vignon ker da Remen-
gol, da bedi evit he bobl an *Itron-Varia-Remed-Oll*. Beza en
devoa an eur d'he guelet brudet bras e pevar c'horn Breiz-Izel,
hag o vervel entre divrec'h sant Guenole, e Landevennek, e
recommande he ene da Zoue, en eur lavaret gant fizians :

Itron Varia Remengol,
Miret ouzin na zin da goll!

C'houezec kant vloas a zo sbaoue e maro Gralon, hag ar
Vretonet, pere zo, bepret, tud a feiz hag a galon, ho deus
c'hoas sonj eus ho roue coz, hag euz he vignon sant Guenole.
Mæs ma c'hanavefent guelloc'h histor ho bro gaër, pa zeont
da zul an Drindet da bardon bras Remengol, ha pa velont
môr Douarnenez, Mene-Hòm, Landevennek, ha tour huël Iis
miraculus an *Itron-Varia-Remed-Oll*, e lavaret, an daëlou
en ho daoulagad, en eur vale gant respet var douar ar sient
hag ar rouane :

Braz ar burzudou a zo bet
Ebars en amzer dremenet !..

Bras ive ar burzudou a ro c'hoas, hirio, an *Itron-Varia-Rem-
mengol*, en andret an oll Vretonet, hag ispisial, en andret
ar belerinet a deo, bemde, d'he goelet, alies eus a bell bro, a
kalz anezho diarc'hen, hag e korf o rochedou.

Ar vinoret dilezet, an intanvezet paour, ar beourieu noaz,
soudardet Breiz-Izel, e kreiz tan ar brezel, ar vartolodet var
ar môr bras e furof, an oll dad allijet a gorf, a galon hag a
speret, darn en ho foanion, darn en danjerriou, dara allen
dizesper, ha darn, ive, var guele ar maro, ho deus sonj euz
ho Mam douc'ha mad, hag aliez e leveront dezhi, gant karante
a gant fizians en he galloud hag en he madelez :

O Guerc'hez zakr Remengol, patronez Breiz-Izel,
Pedit evidomp, hirio, a pa rankimp mervel,
Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonet,
Ho deus ho karet, ho kar, hag ho karo bepret !

GUERZ AR ROUE GRALON HA KÆR IS.

Var ton : Judik hag Holofernes ; pe var ton : Bosc'h Elliant.

I

Petra 'zo neve e kær Is,
M'ar ze ken foll ar iaouankis,
M'ar klevan-me ar binioù,
Ar vombard ac an delennoù ?

N'eus en kær Is netra neve,
An ebattou ma 've bemde,
N'eniz en kær Is nemet traou koz,
An ebattou ma 've demnoz.

Bojenno dreist zo divoannet
A dor an ilizou preñnet,
Ha var ar beorien e voëla,
E hisser ar chaçz d'ho drailla.

D'ha c'hoezec vla, an oll verc'h et
N'ho deus doue 'met ar pec'h et,
Ha, da ober he gurunen,
E roont ho c'haëra rosen.

Abès merc'h ar roue Gralon,
Tân an ifern en he c'halon,
Er pen kenta deuz an diroll,
A gass d'he c'heul ar gaër da goll.

Sant Guenole, gant kalonad,
So bet me 'ur vech kaout he zad,
ha gant dsêlou, an den Doue
En deuz lavaret d'ar roue :

« Gralon, Gralon, taka eves
» D'an dizurzou a rên Abès ;
» Rac tremenet vo an amzer
» Pa skui llo Doue e goler.

» El lec'h ma voa c'hoarzadec kent,
» E vo neuze skrignadec dent,
» El lec'h ma oa kaniouennou,
» E vo neuze scrijadennou !...

Hag ar roue coz spourronnet,
E verc'h e devez keletnet,
Mæs diskaret dre ar gozni,
N'euz mui an nerz da stourm outi.

Ha, skuis gant rebechou he zad,
Evit mont deuz e zaoulagad,
Hi 'deus gret, gant droug sperejou,
Eur palès kaër tost d'ar sklujou.

Eno, gant he amourouchen,
Ema lenos an obaden,
Eno, en aour hag er perles,
Evel an heol e pâr Ahès...

II

« Plijadur dec'h er palès-man,
» Merc'het çhentil ha potret skan,
» Plijadur dec'h ha nozvez grèu, »
Eme eur prinç en eur antren.

Ar prinz a zouge dillat ru,
He varo a oa hir ha du,
E izili a verve,
Hag e zaoulagad a zeve.

« Ra viot deut mad, estranjour,
Eme Ahès gant eur bec flour,
» Ia, ra viot deut ar goëlla,
» Mar e'hanveit an traou falla.

— » Neuze n'em bo digomer mad,
A respontas an divroad ;
» Rag me er fall zo ken disket
» Hag an hini neus hen c'hrouet.

A kerkent Ahès d'her pedi,
Da ober eun dro zanç ganthi,
Ha an oll, a eneb Doue,
Goassa ma c'hellent a doue.

Pa oa d'an obaden-ze fin,
Danser Ahès, en eur c'hoarzin
Ac en eur zevel e zion skoa,
A lavaras : « N'ouzoc'h netra !... »

» Kerc'hit din-me deus a gær Is
» Vesseillou zantel an ilis
» Kerc'hit kroas ar C'hrussufiet,
» Eun hosti sacr, ac a velfet !... »

Ahès a respontas timad :
« Kavet vint en ilis va zad,
» Rag va zad diot, me a gred
» An trompler-ze a Nazareth !... »

Tri a redas en berr amzer,
Ag a zisçaras an auter,
Ag an traou zakr a voë douget
Etre ho daouarn miliguët.

Ar prinz ru, raktal m'ho guelas,
A greiz e galon a c'hoarzas,
Hag a lavaras c'hoas enn-han :
« Plijadur de'ch er palès-man !... »

Da genta a doliou boutou,
E vrujunas ar vesseillou,
Goude 'flatras ar Grussufi,
Hag e krenchas var an hosti !...

Ha varne, gant an oll e noas,
En eur gana : « Malloz d'ar groas !... »
E raz, e seiz stum dishenvel,
Dansour ar seiz pec'het marve !

Kerkent ar palès a grenas,
Hag ar c'hurunou a strakas,
Hag a dreus ho zellou nec'het,
E skoás tân glaz al luc'hed.

Na c'honi 'vel, eme ar Prinz ru :
» Me laka Doue var he du !
Ma lavarent oll gant glac'har :
« Ahès he deus kavet e far.

III

Pa oa fiu d'ar sakrilejou,
Messajour au drong sperejou,
Chomet he eunan er palès,
A dosteas da gaout Ahès :

« Va doussik koant, merc'h da Gralon,
» Ha muia karet va c'halou,
» Ha nalfen me ket eneb gis
» Guelet an alc'houe sklujou kær Is ?

— » Va zad a zoug en he guerc'hen,
» An alc'houe aour deuz eur chaden,
» Ha va zad breman zo kousket,
» Ha caout an alc'houe n'allan ket. »

Mæs hen d'he zreid an eum strinkas,
Ha d'he dornik flour a bokas,
Hag he dallas dre he zellou
Karguet a dáu hag a zaëlou.

IV

Heb goud ar pez a dremene
Neuze, eur pevad ac'hane,
En he balès, ar roue koz
A oa kousket en kreis an noz.

Kambr paour Gralon ne oa ean-hi
Netra nemet eur Grussufi
Deuet a zorn eur mignon kær,
Sant Kaourintin, escop Kemper.

Netra nemet eun Aviel
Roët c'hoas gant eun den zantel,
Roët de-han gant Guenole,
Evel eur merk a garante.

Kaër en he gozni, 'vel eun æl,
E kouske roue Breiz-Izel,
Hag, en dro d'he dali, he vleo guen
A re, dispask, eur gurunen.

Neuze, Ahès, ar brinces fall,
Evel pa vije skoet dall,
En he gampr, eb' aon 'rag Doue,
A deu d'laères an alc'houe.

En eur vale var beg he zroad,
Ar verc'h a dosta skan d'he zad,
A goustadik deuz e guerc'hen,
A denn, n'eur c'hoarzin ar c'haden.

Piou a deu du-hont gant ar ru,
Pignet var eun inkæue du,
Hag en d'an daon lamp var e guein,
Ken a strink an tân deus ar vein ?

Ennes eo messajour Doue,
Digasset en Is d'ar roue ;
Hemmes eo abostol ar feiz,
Sant Guenole, karet en Breiz.

Tostad 'ra en eur c'hafonpad,
En he zorn deo he vaz abad,
Hag eur stôl aour var he zaë ven,
Hag eur c'helc'h tan en dro d'he ban.

Setu-hen e dôr ar palès
E p'hini e kousk tad Ahès,
Divoar e varc'h, an-den santel
A c'halv, en noz, a voëz huel :

« Gralon, Gralon, sao eb dale,
» Sao evit c'heuilla Guenole,
» Sao evit tec'hel rog ar mor ;
» Sklujo ker Is a so digor ! »

Hag ar roue koz trubuillet
Er mes e vele zo saillet :
« Din-me, din-me, va marc'h, prima !
» Siouas ! peur gollet ar gær ma !... »

Ha gant glac'har, e ber amzer,
E ker da heul he vignon ker,
Ha var ho lerc'h, en eur huaadal,
E clévont ar mor o'ruillaal.

Neuze ar brinces diroller,
He amoureux gant-hi Kolllet,
Dre gær Is, a glei hag a zeo,
A rede dispaket he bleo.

Pa glevas daou lamp ar c'hezek
Arog ar môr e tisedek,
Dre al luc'het gant nec'hamant,
E c'hanve he zad hag ar zant.

« Va zad, va zad, ma-r'em c'harit,
» Var ho marc'h skan va c'homerit,
Hag ep'respont an tad teneoret,
A zao e verc'h oar an tailler.

Kerkent ar mór a vuanna,
 Ha Guenole, en eur greña,
 A gri : « Gralon, tól an diaoul-ze !
 » Divar dailler da hinkane !...

Kouskoude c'hoas, leun a enkres,
 An tad a zale'h ar peclheres,
 Mæs ar zant a ra sin ar groas
 Ha stog ont-hi pen he vaz.

Kerkent mestres an droug-speret
 A ruill er mór bras fuloret,
 Hag e kleo tost ar roue koz
 Eur c'hoarzin skillr' e kreiz an noz.

Mæs rentet skanvoc'h, ep dale,
 E sail prim da c'heul Guenole,
 Hag e varc'h, gleb e beder c'harr,
 A lamp deus ar mór en douar.

Breman, Abès Mari-mór-gan,
 Deus skeut al loar, en noz, a gan,
 A gan, ac en eur vouse'hoarzin
 A grib en od e bleo bezia.

VI

Da zao-heol, ar sant ha Gralon
 A bigne varilein Mene-Hôm,
 P'hini, e dreid ebars en trez,
 'Zao he ben var Douaranez.

Ac'hane, roue Breiz-Izel
 Yar he lerc'h a dolas eur zel :
 Mæs el lec'h Is, gant he deg dor,
 Na velas mui nemet ar mór.

« Eur gær em boa deus ar gaëra,
 » A setu hi et da netra !... »
 Hag he galon oll a fraïllas,
 Hag e zaoulagad a voëlas.

« Gralon, Gralon, 'me Guenole,
 » Gralon, d'an daoulin ganem-me. »
 Ha Gralon, dindan he c'hlac'har,
 A goë d'an daoulin d'an douar.

Hag eno, dispak he vleo guen,
 Hag he dall pleguet er boutren,
 E lavare c'hoas ar roue :
 « Ra vo gret bolonte Doue !... »

Pa zavas divar he zaoulin,
 Dindan tân flam heol ar mintin,
 E velas a dreuz he zaclou,
 O Iuguerni Ru-men-Goulou.

Var ar men-ze, hon tadou koz
 A skuille goad d'eun Doue foz ;
 Hag ar aoue, en ber amzer,
 A lavaras dhe vignon kær :

- « Du-hont, e memor a gær Is,
- » Me a rañ sevel eun ilis.
- » Hag, evit testeni d'an oll,
- » M'he galvo ilis Remengol (4).

- » Rac var dolmen ru Teutatès,
- » Me lakeñ da rën ar Verc'hes,
- » Ha bep bloas, en benor d'ar Groas,
- » E ria ober eur pardon bras.

- » Eno, an oll dud afillijet
- » A gavo d'ho foanio remed,
- » A silvidiguez d'ho ene,
- » Dre c'hraz Mari, guir Vam Doue.

- » Pa vo an doueou maro,
- » A koët meur a goat dero,
- » Eun de, deuz ar pevar avel,
- » E teuio d'i pobl Breiz-Izel.

- » Neuze ma ve sonj a C'hralon,
- » E vo lavaret a galon :
- » Bras ar burzudou a so bed
- » Ebars en amzer tremenet !... »

(4) Remengol, hanvet gouechal *Ru-men-Golou*, da lavaret e *Men-ru-ar-goulou*, abalamour ma oa eno eur men ru, pe eun templ, konsakret da c'houlou de, enoret evel eun doue dindan an hano a Teutatès (Doue-Tad). Ar roue Gralon, goude beza diskaret an templ-ze, ha savet, en he blaz, eun ilis kaër da Vam ar guir Doue, a chanchas hano payen *Ru-men-goulou*, en hano christen a *Remengol*, da lavaret e *Remed-Oll*, deus a behini ar Batrones a so hanvet an *Itron-Varia Remed-Oll (Notre-Dame de Tout-Remède)*, abalamour d'ar burzudou bras a ra bemdez, eno, ar Verc'hes abaoñ amzer ar roue Gralon betek hirio.

Eno, zo c'hoas induljançou a re vrassa roet gant hon Tad santel ar Pab d'an oll gristenien a deiz da Remengol, da bedi a galon Patrones Breiz-Izel. Dre eur skrit apostolik roet e Rom, en ilis Sant-Pêr, kement beleg a lavar an oferen var aoter vras an Itron-Varia Remengol, a denn a baññion ar purgator eun ene, p'hini a ia raktal d'ar baradoz.

An dregont a vis maë 1858, an Itron-Varia Remengol a so bet kurunet gant eur gurunen aour ha perles roet dez-hi gant hon tad zantel ar Pab Pii nao.

Remengol a so het, a vizeoas, ar gaëra hag ar santela ilis a Vreiz-Izel; hervès an dud koz, peb guir Vreton a gle, eur veach da viana, *deo pe varo*, ober pelerinach Remengol.

PEDEN AR ROUE GRALON

D'an Itron-Varia Remengol.

Itron Varia Remengol,
Mirit ouzimp na zäimp da goll ;
Pedit ive ho Mab Jesus
Ma vezimp gant an evurus.

Itron Varia Remengol,
C'hui eo rouanez ar bed oll ;
Bezitt hor mam hor batrones,
A ni ho meulo da james.

